

E KEMPER, E TY IANN SALAUN, LEORIER

— PROPRIÉTÉ —



MISSION QUIMPER PARREZ PLUGUEN

ER BLOAS 1869

Fecit mihi magna qui potens est.

Ann Oll-C'halloudec en deuz groet
burzudou bras em c'henyer.

Cetu eta achuet ar Mission santel-ze e pehini am euz bet
ann eur vad d'eh em gavout!

Ra blijo gant Doue ober dign ar c'hraç na gollin morse
ar sonj anezhi.

Ah! gant guirionez e renkan lavaret, gant ar Verç'hes gloriüs Vari, va mam douç ha mad : *Va ene a rent gloar ha trugarez da Zoue... rag m'en deus grøet burzudou bras em c'henve r.*

Evid guir, petra a oan-me araug ar Mission, ha petra ouñ deut da veza breman? Ar guel eus ann daou stad-ze ken dishenvel ann eil dious eguile a zesko dign petra a renkin da veza en amzer da zont.

Petra a oan-me araug ar Mission ?

Siouas dign! E pe stad truezuz am boa-me laket ar zae venn eus va badiziant! Ped gueich ne oan-me ket en em zavet a cønep Doue va C'hrouer ha va zad carantezus! Marteze am boa grøet kement pec'het so, marteze e oan couezet er brassa disurjou!

Ped gueich n'en devoa ket fallet da Zoue ober dign distrei davatan! ag e rean ar scouarn vouzar pa felle da Zoue parlant ous va c'ha'ouñ ha va c'hentelia dre remorzou va c'houstianç, dre ar sermoniou ha dre skuer vad va mignounet, va amezeien ha va c'herent! — Ne chilaouen nemet mouez ann droug-speret a levere dign kenderc'hel er stad ma oan ha beza e peoc'h. Ia, crena a ran pa zonjan, ann adversour touet-ze eus va zylvidiguez a gasse ac'ha-noun gantan dre ann hent ledan a ia d'ann ifern, ag e vijen, buhan avoalc'h, couezet er punc-ze a dån, panefe eo deut ar Mission-man, evel eun taul gurun, da zivuna ac'ha-noun ha d'am zenna er meas eus eur stad ken noasus.

Cetu petra oan.

Petra ouñ-me hyrio ?

Ah! peguen dishenvel eo ar stad e pehini en em gavan breman! Ar zae venn eus va badiziant, guelc'het gant goad va Zalver Jesus, a so bet rentet dign ken glan ha ken dinam evel ma oa en devez ma oa bet guisket dign evid ar veich kenta.

Epad ann neubet devejou am eus tremenet er Mission, o sonjal hebken en asfer eus va zylvidiguez, am eus clevet

disclœria guirionezou terrubl ha ker spountus, ma vijen couezet en disesper o velet ann niver bras eus va fec'hejou ag o sonjal er justic a Zoue. Hoguen clevet am eus ive, epad ann devejou santel-ze, lavaret peguer bras eo ar vadelez ag ann drugarez a Zoue evit ar pec'her a zistro davatan. Neuze, leun a gouraich, oun eat da gavout ar helec, ag eno, daoulinet dirazan, am eus anzavet gant guirionez va oll bec'hejou. Tenn bras eo bet dign hen ober, mœs ive pebes joa evidoun pa eo bet, dre ann absolven, lamet va oll bec'hejou a zivar va c'houstonç, ha rentet ar peoc'h d'am ene! Ia, cetu e pe stad emañ hyrio : e peoc'h gant Doue, e peoc'h gant ann dud, e peoc'h ganên va-unan. Pebes eñrusdet!

Petra a renkin-me da veza en amzer da zont ?

En em viret a renkan gant ar brassa sourei d'eus ann affeil er pec'het. Evit en em zicour d'hen ober em bezo sonj eus a gomsou Jesus o lavaret penaus pa zeu ann den d'affeilla er pec'het, e eil stad a zeu da veza goassoc'h eguet ann hini kenta. Beilla a rin, abalamour d'ann zempladurez, var va oll skianchou, var va speret, va c'haloun ha va enc. Ne vankin morse d'am fedennou d'eus ar mintin ha d'eus ann noz : heulia a rin, a galoun vad ha penn da benn, lezen ann Aotrou Doue; miret a rin gourc'hemennou Doue ha re ann Ilis : tostaat a rin ous ar sacramanchou kellies gueich ma roio dign va c'hoessour ann ali d'hen ober. Eur veich deut ar mare da vond da goës ne zalein ket, mond a rin doc'h-tu, gant aoun, ma zalefen eun nebeut, d'ascoueza adarre er pec'het a ziegui. En em zioual a rin, nan hebken eus ar pec'hejou marvel, mœs ive d'eus ar pec'hejou dister, ha m'em beffe ar goal-er, Doue ra viro! da goueza en eur pec'het grevus benag, e c'houlennan hyrio digant Doue ar c'hraç da goës ar pec'het-ze ar c'henta ma hellin, gant aoun na zeuje ar maro d'am zurpren er stad-ze. Pa vezin tentet, m'em bezo sonj penaus ann hano hebken a *Jesus* a so traoalc'h evid ober d'ann droug-sperejou kemer ann teac'h; hel lavaret a rin eta gant fizianç, ag er memes amzer en em erbedin d'eus ann hano a *Vari* va mam ag eus a hini *S. Joseph* va froctour. Ia, *Jesus*, *Mari* ha *Joseph*, cetu eno ann tri hano galloudus a zifenno ac'hanoun var ann douar dious adversourien va zylvidiguez, ag a zigorro evidoun goude va maro doriou ar *Barados*.

Cetu petra a bromettan oc'h achui ar Mission-man. Ra
vezin sicouret gant Doue !

Pater. — Ave. — Credo.

Pe e brezouneec

Hon Tad pehini a so en Ee. — Me ho salud Mari. — Me
gred e Doue.



PEDEN GOUDE AR GOMMUNION

Cetu, o va Jesus douc ha mad meurbet, en em daulan
d'ann daoulin dirazoc'h, ha gant ann oll ners eus va ene, e
teuan d'ho pedi ha d'hoc'h aspedi ma lakafoc'h doun em
c'haloun santimanchou nerzus a feis, a esperanç ag a ga-
rantez, eur guir glac'har d'eus va holl bec'hejou ag eur guir
volonte d'en em gorrija diouto, epad ma sonjan e va speret
ha ma sellan ennoun va-unan ous ho pemp gouli, gant cals
a garantez ha gant eur gdir glac'har, o cahout dirag va
daoulagat ar c'homsour a levere gueichal ar prophet David
ac'hanoc'h, o va Jesus leun a vadelez : *Toulet ho deuz va
daouarn ha va zreit, niveret ho deus va oll eskern.*

*(Eun induljanç plenier a c'hounexer pa leverer ar beden-
man dirag eur Grucifi goude beza communiet. Ann induljanç-ze
a heller da c'hounid evid ann eneou eus ar Purcator.) (Déc.
Cong. S. ann Indulg. 10 Ebrel 1821.)*

Permis d'imprimer.

Quimper, le 2 Juin 1868.

ÉVRARD, Vic. g.

Moulet e ty J. B. LEFOURNIER hena e Brest.